

GWERZ TRUEZUZ

GRET

DA I.-V. HERNOT

MARVED ENN TI HE DAD

E LANN-HUON

AR 19 A WENGOLO 1869.

Dixi : Nunc capii.

WAR DON : Bez ez euz eunn hano.

Selaouet, ma zud vad, selaouet, me ho ped,
Eur werz a zo zavet gant glac'har vraz meurbed ;
Gret eo d'eunn den iaouank zo marvet n'euz ket pell
Troc'het a greiz he nerz vit kanvo Breiz-Izel !..

Ann Anko a zo kri, bepred eo lemm e falc'h,
Kaer en deuz skei noz de, biken na sko trewalc'h ;
Ar varskaon a weler war he lerc'h e peb bro,
War goz ha war iaouank didruez braz e sko !

Ar sperejo kaera, ann dud ar gwieka,
A glask, gant plijadur, d'ho diskar da genta ;
Kaer a zo he bedi, e buez na lez den,
Ha kerKent hag e dol, hon c'horfo a ve ien !

Holl e renkomp mervel ha disken enn douar ;
Paour ha pinvik, d'ho zro, a ielo enn he gar ;
Kouskoude e karfemp, awecho, harz out-han
Da gas diwar ar bed neb a garomp muan !..

Allaz ! biken na gleo na peden na klemmo,
Biken na dremeno heb achui he dro ;
Ann anken, ann daelou, setu he garante
Hag evid ho hada na baouez da vale !!..

Eunn tol ez teuz skoet, ho ! kria tol, maro !
Ma c'halon zo rannet ha da viken e vo...
Ma mignon ne man ken, lonket eo gant ar be...
Enn desped da dud Breiz, d'ho daelo ha d'am re !..

Iann-Vadezour Hernot, ez teuz skoet, maro !
Eur c'holl braz ez teuz gret d'he dud kez ha d'he vro...
Kredi a raa breman ec'h out dall ha digar
Pa skoez evel-se eunn den dornet dispar !..

Na wiez ket, maro, hep mar na wiez ket,
Pa poa skoet da dol war biou ez poa skoet ?
War eur skeudenner braz, galvet da enori
Breiz-Izel he vamm-bro, meurbet karet gant-hi !

War vab Ervoan Hernot, ar skeudenner brasa
A voe gwelet biskoaz enn Arvor o veva ;
Troc'het ez teuz maro, eur bar hag a voa glaz,
Eur bar en doa bleuniet, en dije bleuniet c'hoaz !..

M'az pije daoulagad da welet ar glac'har
A voa er c'halono pa ieaz enn douar ;
M'az pije bet daelo hag eur vouez da c'harma
Te az pije garmet ha gwelet da guenta !

Da welet he dad paour, he galon bruzunet,
He vamm hag he vreudeur ho c'halono rannet ;
O skuilla ho daelo gand ar vignoned vad
A voa deut da wela enn dro d'he a vagad !..

Diskennet eo er be ann hini a gariz,
A c'honeaz ar maout e Breiz hag e Pariz,
Ann hini a raje, m'en dije bet bue,
Kalz a dreo kaer meurbed : galloud en doa da ze !!!...

Diskennet eo er be da gousket he hun ien ;
Ac'han da ze ar varn, allaz ! n'hen gwelin ken ;
Biken ne ra netra evid enor ar vro,
Et eo kuit re abred, sell da labour, maro !..

Biken ne ra netra evid he vamm he dad,
A gare kouskoude evel pep bugel mad ;
Red a vo da Hernot poania stard a neve
Da rei penn d'al labour en deuz a vern bemde!..

Kenavo ma mignon, kenavo enn Envo,
Eno te a zo mad gand Doue, hon Aotro,
Zikour da bedenno d'az tud a zigasi
Hag oberio da dad a ielo war greski !..

Evid dere'hel envor euz da hano karet
Em euz, dre garantez, ar werzik man zavet ;
Moredet em euz kalz, moredet em euz re,
Distol a c'houlennan, mignon, digan-ede ?..

I.-M. AR IANN.

Gwemgamp, eost 1871.